

D'an 13 a viz Gouere

- War-dro ar bloaz a c'hras 50, e Makedonia, merzherenti sant Silas, eskob. Edo e strollad an Diskibled e Jeruzalem pa voe dibabet gant an Ebestel evit mont gant Paol ha Barnabaz da Antiokeia. Gant sant Paol ez eas ivez da c'hGalatia, da Siria, da Silisia, da vMakedonia. E Filipez e voent gwialennet, taolet d'an toullbac'h ha dieubet dre vurzhud. Diwar-se e c'houlennas o gwardour bezañ badezet war un dro gant e diegezh. Hervez an hengoun e voe Silas eskob e Korinto.
- E 195, en Aleksandria, da vare heskinadeg Septimius-Severus, merzherenti sant Serapion a voe dêvet ez vev.
- Er Vvet kantved, ganedigezh en neñvoù santez Sarra, penitiourez e gouelec'h an Egipt, anavezet evit bezañ trec'het an temptadurioù krisañ dre ar binijenn.
- War-dro 514, e Pikardia e Bro-C'Hall, merzherenti sant Espian hag e c'hoarezed ar santezed Berc'hed ha Maoura (Gl. Brigide ha Maure). Hervez an hengoun e oant eus un tiegezh brientinion eus hanternoz Breizh (Bro-Skos a vremañ), lavaret e vez ivez eus Skandinavia, o vont da birc'hirinañ da Roma ha d'an Douar Santel evit seveniñ ul le. Lazhet e voent gant ailhoned e Balagny.
- E 1024, sant Herri, impalaer roman-germanek. Ganet e 973, e voe kurunennet impalaer e Roma e 1014. Dimezet gant santez Kunegond e tivizas ganti, chom en diweirded. Bamet gant abati Cluny e pourvezas ilizoù, manatioù evel hini Gorze ha Sant-Maksimin, hag e aesaas adreizhidigezh an Iliz. Marvet e Grona e voe sebeliet war e c'houlenn en iliz-veur Bamberg en doa diazezet e Frankonia Bayern.
- E 1298, distro da Zoue ene ar gwenvidig Giacomo da Varazze (Gl. Jacques de Voragine), dominigad, arc'heskob Genova. Skrivañ a reas al Legenda aurea o tanevellañ burzhudoù Doue e buhez ar sent, ma kaver ennañ buhez an Teir Mari a voe brudet e Breizh gant an eskob Pêr Naoned.
- E Breizh, e 749, sant Turiav (Lt. Turiavus), abad hag eskob. Stummet da-gentañ e manati sant Gwalon e Lannolon e Bro-Dreger ha da c'houde gant sant Tiervael e Dol e voe dibabet da warlerc'hiad hemañ e penn an abati hag an eskobiezh e 733.
- E Breizh, en VIIIvet kantved, sant Buzogan, manac'h e-kichen Dol, kofezour sant Turiav.
- War enez Vreizh (Kembre), er Vvet kantved, sant Dogvan (Dofgan, Doewan), merzher evit ar feiz war aodoù Pennvro. Hervez lod e vefe mab Brec'han.
- War enez Vreizh (Kembre), er VIvet kantved, sant Yuz, penitiour, mab sant Gerent.
- En Iwerzhon, sant Grellan (Iw. Greallán), manac'h e Tamlachta, keneil sant Koulmkell.

D'ar 14 a viz Gouere

- E 677, Bro-Wallonia, sant Visant pe Madelgaer pe Maoger, manac'h. Goude bezañ desavet e vugale anezho sant Landri, sant Dentelin, santez Adeltrud ha santez Madelbert, e tivisas gant e bried santez Waodru ren ar vuhez vanac'h, eñ da gantañ e manati Hautmont ha da c'houde en abati Soignies en doa diazezet.
- E 775, e Deventer e Bro-Friz, sant Marsellin (Marculf pe Marchelm), beleg manac'h. Genidik eus Bro-Saoz e voe, adalek e vugaleaj, diskibl da sant Willibrord hag ez eas gantañ da aviañ ar pobloù german.
- E 1614, e Roma, sant Kamilh Lellis, beleg, diazeour al leoned hospitalourion anvet ar Gamilhaned, paeron ar glañvourion. Ganet e rannvro Abruzzo e rouantelezh Napoli, e oa soudard hag sac'hluet gant e zoug bras d'ar c'hoarioù. Kavout a reas e c'halvidigezh pa yeas da skoazellañ da intent ouzh ar glañvourion en ospital an Dibareidi e Roma lec'h ma oa bet kaset abalamour d'un angreizh d'e c'har.
- E Breizh, er Vvet kantved, santez Trefina pe Trifina (Lt. Triphina), merzherez. Merc'h Gwereg Iañ a Vro-Ereg e voe dimezet gant Konveur (Konomor). Muntret gantañ e voe dasorc'het gant sant Gweltaz. Genel a reas ur mab anvet Gweltaz Trec'h-Meur (sant Tremeur) hag e echuas he buhez en ur gouent.

- E 687, e Bro-Hannonia (an Hainaut), sant Visant Soignies ganet Madelgair Famars, abad. Hervez lod e vefe iwerzhonat a orin hag e anv Maelgader (Mael Ceadar ; Iw. Maolchatair). Servijet en dije e lu ar roue gall Dagoberzh I añ en dije roet dezhañ kontelezh Hannonia evit e drugareakaat goude ur gefridi en doa fiziet ennañ en Iwerzhon. Dimezet e oa gant santez Gwaltrud ha goude bezañ desavet o fevar bugel, sant Landry, sant Dentelin, santez Adeltrud ha santez Matelbert, ez eas da vanac'h e manati Hautmont hag e tiazezas abati Soignies e Gwallonia lec'h ma voe abad gant an anv a Visant. Eno e varvas.

D'ar 15 a viz Gouere

- E 417, sant Bishoy, abad en Egipt. Ganet e rannvro Menoufeya en Egipt e teuas da vezañ mignon sant Yann Colobos hag ez ejont o-daou da vezañ diskibled sant Pambo. Goude marv hemañ ez eas Bishoy da benitiour hag e voe mestr speredel meur a vanac'h a zeue d'e gaout, brudet ma oa evit e garantez, e vadelezh, e eeunded hag e vuhez a binijenn. Gweladennet e voe gant sant Efrem ar Siriad. E gorf a vez miret dibistik e manati Sant-Bishoy Wadi-El-Natroun.

- E 1015, sant Vladimir, dug-meur Kiev. Mab-bihan da santez Olga, mab yaouer Sviatoslav, priñs Kiev, e voe desavet er paganiezh daoust ma oa bet gonezet e vamm d'ar gristeniezh. Goude muntr e vreur e pignas war ar gador-veur e 980. E 988 e tegemeras ar vadeziant a-gevret gant e bobl e dour an Dniepr. Dimeziñ a reas gant ur briñsez bizantat hag e labouras da aozañ ur Stad gristen a voe a levezon vat e-kerzh meur a rummad.

- E 1242 e Polonia, ar gwenvidik Ceslas, beleg eus Urzh ar Brezegenerion. Eus un tiegezh uhelidi eus Silesia e voe degemeret en Urzh gant sant Dominig ha kaset gant sant Hyacinthus da brezeg e Silesia hag e Polonia. Bez' e voe ambrouger speredel an dugez santez Hedwija eus Silesia (Al. *Schlesien*).

- E 1274, e Lyon, sant Bonaventur a vBagnorea, eskob ha doazhour eus an Iliz. Brudet evit e gelennadurezh, e santelezh, e oberennoù heverk e gwazerezh an Iliz a dalvezas dezhañ bezañ lezanvet an doazhour serafek. Ganet e-kichen Viterbo ez eas e urzh ar Vreudeur Vinored hag e kelennas e skol-veur Pariz. Diuzet da vezañ gwaziad hollek an urzh a oa o kreskiñ e teuas a-benn da zoujañ ouzh spered sant Frañsez war un dro gant reiñ ar frammoù ret. Deuet da vezañ kardinal-eskob Albano e varvas e-pad senez Lyon.

- E 1851, ar wenvidigez Anna-Vari Javouhay, diazevourez. Ganet en eskobiezh Dijon e tiazezas gant teir c'hoar un oberenn ouestlet d'ar c'helenn. E 1812 en em stalias ar gumuniezh tost da rivinoù abati Cluny hag e kemerjont an anv a Gengregadur Sant Jozef Cluny a ziorreas en un doare burzhudus p'edo bev c'hoazh an diazevourez.

- E Breizh, e 383, santez Eved (Gl. Evette, Edwette), penitiourez. O tont eus Iwerzhon gant he breur sant Deved e reas peñse o bag hag e varvas an holl skipailh nemeto o-daou. Douarañ a rejont e Penhors e Pouldreuzig er Vro-Vigoudenn. En em staliet he dije en Eskevien lec'h ma varvas.

- E Breizh, sant Riwal, beleg.

- War enez Vreizh, er VIIvet kantved, sant Donald, abad Ogilvy. Genidik eus hanternoz an enezenn (Bro-Skos) e oa dimezet hag a-raok mervel e wreg a rebadas outañ plediñ gant o nav merc'h. Divizout a rejont holl bezañ leanezed hag o zad a reas eus o zi o c'houent a voe renet gantañ.

D'ar 16 a viz Gouere

- Gouel Itron-Varia Menez Karmez: Ar Skritur Sakr a ro meuleudi da gened ar C'Harmez lec'h ma tifennas ar profed Elia feiz glan Israel en Doue bev. Da vare ar c'hroaziadegoù e tibabas un nebeut penitiourion ren ur vuhez a arvesterezh war ar menez santel damdost eus Nazared lec'h ma vevas ar Werc'hez Vari "o virout pep tra en he c'halon". Goulenn a rejont ur reolenn digant eskob Jeruzalem ha setu ma voe penn-kentañ Urzh ar C'harmez en em ledas buan en Europa ar C'Hornôg betek e Breizh.

- En IIIe kantved, merzherenti sant Domnin a Avrille, bugel merzher, genidik eus Nikomedia hag e gumpagnuned Aventin, Marin ha Justin, merzheriet war urzh Rictiovarus profed gallian da vare

Diocletianus. Emañ relegoù sant Domnin en iliz-veur ar Puy lec'h ma vez kehelet.

- E 556, sant Eler pe Eleri (Lt Hillarius, Gl. Helier, Illers), penitiour ha merzher. Ganet e Tongres eus tud a orin eus Breizh-Veur e voe skoliet e manati Nanteuil dindan sant Marcouf. Da c'houde ez eas da benitiour e bae Sant-Albin e Jerzenez. Edo abaoe trizek bloaz en e beniti pa voe tapet ha merzheriet en ur mougev gant ar Saozon.

- E 851, e Kordova, sant Sisenand, diagon ha merzher dic'houzouget gant ar vMaored en abeg d'e feiz.

- E 866, ar wenvidigez Irmengard, abadez Chiemsee e Bro-vBavaria. Hag hi merc'h Loeiz II Germania e tilezas splanderioù al lez evit mont da vanac'hez hag e voe abadez ur gumuniezh niverus.

- E 1846, e Sant-Salver-ar-Beskont en Normandia, santez Mari-Madalen Postel, diazevourez. Da vare an Dispac'h Gall en em ouestlas d'ar re glañv ha d'ar c'hatekizerezh ha goude e tiazegas er vrasañ paourentez Kongregadur Merc'hed an Drugarez evit desevel ar plac'hed tavantek.

- E Breizh, e 635, sant Tenenan (Tinidor pe Tenan), eskob e Leon, Iwerzhonad, diskibl sant Karanteg. Deuet da Vreizh en dije dilestret e "Gwarez Laouen" er Forest-Landerne a-raok mont da benitiour e Lezkelen e Plabenneg. Eno e stourmas ouzh argadegoù an Daniz kement ha ma vez roet dezhañ an anv a "Salver ar vroad" gant Dibareg eskobiezh Leon. Goude marv sant Goulven eo deuet an dud d'e c'houlenn da gemer e lec'h war sez eskobiezh Leon.

- E Breizh c'hoazh, sant Similian, abad Taorieg.

- En Iwerzhon, er Vvet kantved, santez Skodin, (Iw. Scoithín), maouez santel a savas un Iliz e Clúain Mór.

D'ar 17 a viz Gouere

- War-dro 411, e Roma, sant Aleksis, klasker bara. Ganet e Roma eus ar senedour Euphemianus dimezet gant an uheladez Aglaïs, e voe kefrisiet enep dezhañ hag e tec'has da Siria ha da Edesa. Eno e vevas a-hed 17 bloaz diwar an aluzenn hag e skedas e santelezh. Dre ma teue da vezañ brudet e kemeras en-dro ar mor hag e voe kaset e vag gant an avel betek Roma lec'h ma vevas, e-doug 17 bloaz c'hoazh, evel ur c'hlasker bara a gave repu dindan dirri palez e diegezh. N'eo nemet da zeiz e varv e voe anavezet. Sebeliet en Aventino e voe brudet-kenañ kement ma voe disklêriet gouel sant Alessio, deiz berzh e Roma er XVII vet kantved.

- War-dro 398 e Mediolanum (hiziv Milano), santez Marsellina, gwerc'hez, c'hoar sant Ambroaz. Degemer a reas gouel ar gwerc'hez diwar zorn ar pab Liber e brientiliz Sant-Pêr da zeiz Epifaniezh ar bloaz 353 hag ez eas da Vilano da-heul he breur a skrivas eviti e skrid-kenteliañ *De virginibus*.

- War-dro 660, santez Eorcengota, merc'h santez Sexburga hag hi merc'h Anna roue Angled ar Reter, c'hoar santez Ermenilda, abadez Enly, e voe hi manac'hez e Faremoutiers e Bro-C'Hall.

- E 855, sant Léon IV, pab, gwarezour ar Gêr hag adsavour primad Pêr. Profañ a reas da sant Konvoion relegoù ar pab sant Marsellin hag e roas ar gurunenn da Novenoe roue ar Vretoned. Da gentañ manac'h e Sant-Varzhin Roma e voe diuzet da bab e 847. Evit talañ ouzh aloubadegoù ar Sarazined e savas mogerioù tro-dro d'ar gêr ha d'ar Vatikan a anver c'hoazh Mur Leon. Dont a reas a-benn da virout frankiz a-walc'h e-keñver galloud an impalaered hag e c'halvas d'ar sentidigezh eskibion evel Hincmar eus Reims hag uheldad Kêrgustentin.

- E 1399, distro da Zoue santez Hedvija, e Krakovia, rouanez. Ganet en Hungaria e teuas da vezañ rouanez Polonia hag e timezas gant Jagellon, dug meur Lituania. Hemañ a voe badezet dindan an anv a Ladislav hag e hadjont o-daou ar feiz katolik er vro.

- E 1794, ar wenvidigez Mamm Thérèse de Saint-Augustin hag he c'heneilezed, 16 karmezadez Compiègne, barnet d'ar marv en abeg d'o fealded ouzh an Iliz ha dic'houzouget.

- E Kembre, er Vvet kantved, sant Kenlo, feizvonnour.

- Er VIIvet kantved, sant Fredegan (Gl. Frégaud), manac'h iwerzhonat, keneil sant Follan a savas ur manati e Deurn e-kichen Anvers er Brabant.

- War-dro 812, sant Kenelm (Cynehelm), priñs Mersia e Bro-Saoz ha merzher. Lazhet e voe en un doare ganas hag e c'hoarvezas burzhudoù war e vez en abati Winchcombe er Gloucester.
- E 1012, sant Kolman, manac'h iwerzhonat, merzher. O vont war-zu Jeruzalem edo o treuziñ Aostria pa voe lazhet gant tud e gemeras evit ur spier, e-kichen Stukerau nepell diouzh Viena. Krouget e voe ganto ouzh ur wezenn hogen e chomas dibistik e gorf e-kerzh ur bloavezh. Neuze e voe anavezet evel ur sant ha kaset e gorf da abati Melk lec'h ma vez kehelet evel ur merzher.

D'an 18 a viz Gouere

- War-dro ar bloaz a c'hras 375, distro da Zoue ene sant Pambon, penitiour e gouelec'h Nitria e kornôg delta an Nil e voe diskibl sant Anton.
- E 640, e Habend er Vôge (Vosges), sant Arnould, eskob. Uheliad e rouantelezh Aostrazia e voe kuzulier ar rouaned Theodebert ha Klotar II a Vro-C'Hall. Pa voe anvet eskob Metz ez eas e wreg Skariberg pe Doda d'ar vuhez leanel. Karget e voe ivez da gelenn ar priñs yaouank Dagoberrzh. Goude marv Klotar e tilezas e eskobiezh evit mont da vanac'h en abati e vignon sant Romarig, hiziv Remiremont, a heulie reolenn sant Koulman. Echuiñ a reas e vuhez evel penitiour e-kichen an abati oc'h intent ouzh tud lovr a zegemere. E vab Angasil zo hendarb Karloman.- E 838, merzherenti sant Frederig, eskob Utrecht. Anvet gant Loeiz Kuñv, mab Karloman, en em ouestlas da avielañ ar Frisoned. Lazhet e vije bet war urzh an impalaerez dre ma rebeche outi he buhez diroll.
- D'an hevelep deiz: Itron Varia an Dieubidigezh, gouel diazezet Kongregadur Santel al lidoù e 1874. Dont a ra an anvadur-se eus ar Werc'hez Du mired e Pariz abaoe an XI vet kantved en iliz Saint-Etienne-des-Grès ha kehelet hiviziken e kouent leanezed Sant-Tomaz-Villanova.
- E Pariz, d'an 18 a viz Gouere 1830, derc'hent gouel sant Visant a Baol gwezhall, emziskouezadenn ar Werc'hez Vari da gKatell Labourée leanez.
- E Breizh, er VI vet kantved, sant Goneri pe Koneri, penitiour-beleg, mab santez Libouban. Ganet Breizh-Veur e voe penitiour e koadeg Brangili e-kichen Roc'h-an, e parrez Sant-Goneri e Bro-Gwened a-vremañ. Mervel a reas e Plougoustant lec'h ma vez kehelet kenañ.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Tiviziv (Tivizian, Tivizieg), eskob a Leon.
- E hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos), e 580, santez Tenev, mamm sant Kendiern. Brudet evit he finijennoù a zalc'he kuzhet e lez ar roue ma veve enni.
- War-dro 383, merzherenti santez Odilia, diskiblez santez Ursula.

D'an 19 a viz Gouere

- Er Iañ kantved, e Koloseos e Frijia, merzherenti sant Epaphras, keneil bac'hidigezh sant Paol, maodiern feal ar C'Hrist a embannas an Aviel e Koloseos, Laodikea ha Hieropolis.
- E 379, war vord an Iriz e rannbarzh ar Pont, santez Makrina, gwerc'hez. C'hoar ar sent Bazil Veur, Gregor Nis ha Pêr Sebast e voe stummet gant anaoudegezh ar Skritur Santel hag en em ouestlas d'ar vuhez digenvez.
- E 514, e Roma, sant Simnak, pab. Bez' en deus bet da c'houzañv digant ar Senez, digant ar roue Teodorig ha digant e gloer e-unan, met a-benn ar fin e teuas a-benn da lakaat e veli da vezañ anavezet.
- E 778, sant Ambroaz Autpert, manac'h. Da gentañ ofisour e lez Pepin-Grenn ha mestr-kelenner Karloman, en em ouestlas d'ar vuhez vanac'h en abati Sant-Visant e dugelezh Benevento lec'h ma savas addisplegadennoù ar Bibl, oberennoù a liturgiezh hag a sentvuhezouriezh.
- E 1427, sant Stefan Serbia, roue. Ober a reas e seizh gwellañ evit gwareziñ ar gristeniezh er Balkanoù dirak aloubidigezh an dTurked.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Maden pe Madon, mevel ha diskibl sant Goulven.
- E 1794, e Pariz, merzherenti ar bac'hiadez Viktoria Konan-a-Sant-Lukaz, gwerc'hez, ganet e Roazhon, desavet e Kimerc'h e Kernev-izel, ezel eus Itronezed ar Retred e Kemper lec'h ma chomas betek ma voe divodet ar gumuniezh. Harzet war un dro gant he zud e voe dibennet a-gevret ganto e Pariz.